

ANVIOÙ HON LEC'HIOÙ (14)

Lann en hon anvioù lec'hioù zo niverus. Ha liesseurt o rummadoù. En tu-hont d'al *lann* « lec'h sakr » pe se, eo ivez anv ur plant, ur plant a blij kalz da Di an Douristed, en pep lec'h, lakaat war wel. Ar glaz hag ar melen flimin zo evel arouez hon maezioù, peadra, ivez, da aweniñ barzhed zo... Met 'm eus aon e vez ankouaaet zo livioù all ken pouezus all en ardremez hon maezioù. Met ne vern, al *lann*-se zo en personelezh hon bro, betek servij da voued d'hon c'hezeg, gwezhall. En 1578 e roe Jucquel Rougeart titl ur ganaouenn, hep reiñ ar pozioù siwazh : *nendequet da pilatlan* « n'eo ket da bilat lann ». Moarvat zo aze ur c'hoari gerioù war an darempredoù karantez, eme hon mignon kozh Gwenole ar Menn, aet kalz re abred. Lennit ivez ar pezh a gont unan eus ar gisti leurennet en *Buhez Gwenole*, skrid eus 1580, gwerzennoù 673-678 :

« Ne stouhenn, ne quemerhenn mez evyt reyf da galant da stryzaf,

Nac oude mar huerou ha pervers me roy ma neyz dezaf :

Evyt pan duy dyouz un penn //

ma e caffo da *pylat* mat ha tenn

Courtes peur flour dam amour guenn //

ha te guenet. Quae dan gueden. » [da lenn : ha te Guenole quae dan gueden]

« Je ne veux pas m'humilier, ni avoir honte de donner à un amant à étreindre, / Tu as beau être amer et grave, je lui donnerai mon nid. / Pour que, quand il viendra d'un côté, / Il le trouve pour le battre bien et durement, / Courtois, très doux, à mon amour tendre ; / Toi, Gwenole, va à la hart ! »

Sklaer ster *neizh* evidoc'h emichañs, ha, *pilat*, eñ eo sklaer e tiskouez an akt seksual (revel a lavar lod)... N'omp ket pell diouzh an droienn *pilat lann* avat !

Hag ivez er ganaouenn-mañ diskoachet hag embannet gant Jef Philippe :

« Bremañ 'tegouezh din ober gwazh :

Pilat lann gant ma zreid noazh,

Pilat lann d'ar marc'h-Hamon

A zo du-mañ e pañsion. »

« Mon sort actuel est bien pis : / Piler de l'ajonc de mes pieds nus. / Piler de l'ajonc pour le jaloux / Qui est chez moi en pension. »

Met ar plant zo anavezet ivez diouzh gouennoù diheñvel : *lann vrezhonek* « Ajoncs nains *Ulex gallii* » ha *lann gallek* « Grands ajoncs ». Met petra eo ster da vat *brezhonek* pe *gallek* en degouezh-se ?

Brezhonek zo evit « endeuat » (endojen mard eo gwell ganeoc'h) ha *gallek* zo evit « ezdeuat » (eksojen mard eo gwell ganeoc'h). Sellit ouzh labour Jules Gros hag ho po kement displegañ dre ar munut. Ar pezh a ziskouez eo ledan a-walc'h ster an anvioù gwan savet war *-ek* (diwar *-eg*), ur gwir hipokoristeg, anat.

Ne vez ket gwelet ar ger-se en un implij proklitek.

Ha n'eo ket evel an trede *lann* hag a dalvez kement ha « lanneg » « lec'h fraost ». Prokliteg ha ger dizalc'h ivez. Alies, gwall alies eo diaes dispartiañ mat *lann* « lec'h sakr » ha *lann* « lec'h fraost ».

Rak a-benn ar fin, n'eo ket un duilhad anvioù en *lann* hon eus er vro, met miliadoù ha miliadoù anezhe. N'eo ket souezhus, dre ma ranker an trede ster diskouez ar bazenn gentañ, an difraostañ, a-raok tapout ar ster kentañ, lec'h sakr.

Ur berniad anezhe na gaver ket ken stank (a-fet tregantad a fell din lâret) entre Kembre ha Kerne-Veur.

« Distac a cor hac en morou

splann dre *lannou* han hynchou meur

Ez redo scaff an anaffon

Daguyt ho corffou dezrou son »

« Complètement détachées, et dans les mers, / Claires par les landes et les grandes routes / Courront vite les âmes, / Pour chercher leurs corps, dès que retentira le son. », eme gwerzennoù ar poz 276 en *Buhez Mab Den*, moulllet en 1530.

En Kerne-Veur e kaver ivez *lann* prokliteg gant anvioù plant, ar pezh zo rouesoc'h en Breizh. Hag en degouezhioù-se eo diaes gouzout eus petore *lann* zo anv : lec'h difraostet ?

Da verkañ zo e kaver *lann* kevreet gant anvioù parrouzioù evel *Trevereg* (en *Trevereg*), *Eviaz* (en *Kerfod*), *Merzher* (er *Merzher*), *Plufur* (en *Plufur*) pe c'hoazh *Servel* (en *Servel-Lannuon*). Hir eo al

listenn avat ha mat e vefe o renabliñ holl ha studiañ penaos int lec'hiet ha petore roll resis a veze gant pep hini anezhe. Ul labour all evit an istorourien adarre.

Ha petra soñjal eus *Lann-Joran* lec'hiet en Ploueg-Pontrev, lec'h ma vez lakaet ar sant-se en tu Iliz-Kaer ? Petra eo statud *lann* amañ ? Evel *Koad-Joran* met ivez *Lanneg-Joran*, tost ha tost, en Rospez ? Ha pan lenner zo bet ul *Lanjorrant* entre Perred ha Santez-Berc'hed, war c'hlannoù ar Blavezh, lec'h m'emañ govelioù kozh *ar Saloù*, en 1456, e c'haller soñjal, didrubuilh a-walc'h, eo ster kentañ *lann* hon eus dirakomp.

Anvioù all, brudetoc'h a gaver ivez koublet gant *lann*, evel *Meriadeg*, un anv kozh-mat amprestet hag azasaet diwar an iwerzhoneg *Muiredeach*, ha kement-mañ en *Tonkedeg* : un anv kaer savet war *tonkad* gant kotamm an *a* diwar levezon an dibenn hipokoristek -eg.

A-wezhioù ivez e c'hall un anv parrouz bezañ lieskementet evel anv-lec'h bihan : sellit *Langoad* evel parrouz met ivez evel anv-lec'h bihan en Boulvriag.

Pan lenner *Diffez-en-Lan* en 1296, en tu Mêlrant, eo eus an difraostañ zo anv, sklaer. Ar ger *difezh* « inculte » zo brudet evit bezañ lod eus lesanv *Alan Barv-Difezh* « Alain Barbe-Torte » hag a voe an dug kentañ, mab ar roue diwezhañ en navet kantved.

En Treglañviz zo ul lec'h anvet *Lann-Ru* lec'h m'eo *ru* ar ger kozh « habitation de campagne », kar d'ur ger iwerzhoneg ivez. Geriennoù a welfomp diwezhatoc'h.

Gwelet hon eus penaos *lann*, er ster kentañ, a c'hall bezañ enklitek : *Gwiglann*, *Plelann*, etc. Ha bezañ zo ur ger hag a ranker menegiñ ma n'eo ket enklitek just a-walc'h : *kellann*. Ur ger dastumet en Skrignag ha sede penaos eo termenet : « *ar gellann* pe *ar gellenn* eo ar maen moan a laker war e silh a-us diri ur vered pe ur vali da virout ouzh al loened da vont dre an diri-se : 'Ar maen-mañ a zo groilhet, anez e oa bet mat da ober *ur gellann* ; pemp *kellann* a zo, war ar vered, e Skrignag.' »

Ar ger zo savet war *kell* « tro-dro al lec'h sakr » « tro-dro al lec'h miret evit ar venec'h » (evel en un abati pe en ur manati, pe zoken evit un eremit e-unan, digavandenn en natur) ha war *lann* « lec'h sakr ». Kement ha bezañ resis *kellann* eo al lec'h bevennet mat gant al lec'h sakr en e greiz. Ar vered a c'hoarie ar roll-se, tro-dro d'an iliz. War-lerc'h, eo deuet ar ster gant taolenniñ mein lakaet da herzel ouzh al loened mont dre ar vered. Mein a reer dioute *strob-an-diaoul* anezhe en lec'hioù all zo. Ul lec'h hag a glot mui pe vui gant ar mennozh *minic'hi*.

[da vezañ kendalc'het]

Herve Bihan

Levrlennadur

[a vo roet en dibenn al lodenn diwezhañ]